

STAGET EO BET

Komzou : Job an Irien

Muzik : Mikael Skouarneg ha René Abjean




1. Sta - get eo bet ___ 'vel tor - fe - tour Hag e zi - vrec'h ___ war ar c'hoad noaz
 2. Ke - me - ret 'neus ___ war e zis - koaz Ar boan ga - ro, ___ an droug a laz;
 3. Oue - let e - neus ___ war or poan - (n) iou Ha dou - gen - net ___ na - on ar paour;
 4. Gwe - let e - neus ___ o 'n em zrail - la Eur béd di - roll ___ ha tud re griz;
 5. Koue - zet an noz ___ war e vu - ez E kin - ni - gas ___ ar boan, ar vad;



1. A as - pe - de ___ peb e - ne - bour Da zi - ze - lei ___ feun - teun e c'hras.
 2. Skri - jet e - neus ___ ha gou - zañ - vet, Med e ga - lon ___ a oa heb kas.
 3. Kle - vet e - neus ___ an huan - (n) a - dou A zao a - greiz ___ bu - ez di - zaour.
 4. Sam - met e - neus ___ 'n eur zi - was - ka War e ga - lon, ___ or c'ha - lon striz.
 5. Daou - la - gad kloz ___ e ga - ran - tez A zi - go - ro ___ war zremm e Dad.



Di - gor braz e cho - mo Beteg ma kan - (n) o ar béd ___



Da - ouarn ar Mab ka - ret E - vi - dom - ni bet sta - get!

1. Staget eo bet 'vel torfetour,
Hag e zivrec'h war ar c'hoad noaz
A aspede peb enebour
Da zizelei feunteun e c'hras.

Diskan : **Digor braz e chomo
Beteg ma kano ar béd
Daouarn ar Mab karet
Evidom-ni bet staget !**

2. Kemeret 'neus war e ziskoaz
Ar boan garo, an droug a laz ;
Skrijet e-neus ha gouzañvet,
Med e galon a oa heb kas.
3. Ouelet e-neus war or poaniou
Ha dougenet naon ar paour ;
Klevet e-neus an huanadou
A zao a-greiz buez dizaour.
4. Gwelet e-neus o 'n em zrailla
Eur béd diroll ha tud re griz ;
Sammet e-neus 'n eur ziwaska
War e galon, or c'halon striz.
5. Kouezet an noz war e vuez
E kinnigas ar boan, ar vad ;
Daoulagad kloz e garantez
A zigoro war zremm e Dad.

IL A ÉTÉ ATTACHÉ !

1. Il a été attaché comme malfaiteur
Et ses bras sur le bois nu
Suppliaient chaque ennemi
De découvrir la fontaine de sa grâce.

R: Elles resteront ouvertes
Jusqu'à ce que chante le monde
Les mains du Fils bien-aimé
Qui pour nous furent attachées !
2. Il a pris sur ses épaules
La dure souffrance, le mal qui tue ;
Il a frémi de peur et supporté,
Mais son cœur était sans haine.
3. Il a pleuré sur nos souffrances
Et porté la faim du pauvre ;
Il a entendu les gémissements
Qui s'élèvent de vies sans saveur.
4. Il a vu se déchirer
Un monde déboussolé et des gens trop cruels ;
Tout en souffrant, il a chargé
Sur son cœur, notre cœur étroit.
5. La nuit tombée sur sa vie,
Il offrit la souffrance, le bien ;
Les yeux fermés de son amour
S'ouvriront sur le visage du Père.